

Difennet eo implij ar jederezh

Taolet e vo pled gant ar reizhskrivadur hag an doare d'en em zispleg dre-skrid : 4 poent.

LODENN GENTAÑ Istor - geografiezh
(18 poent)

Pep kandidat a zibabo ur sujed hepken etre an daou kinniget.

Kentañ sujed

An didrevadenniñ, un darvoud meur er bed goude 1945

Dielloù

Diell Nnn 1

Pennad tennet eus diskleriadur diwezhañ Kuzuliadeg Bandung.

Goude bezañ tabutet war kudennoù ar pobloù e-dalc'h an trevadenniñ ha war disoc'hoù sujidigezh ar pobloù da veli an estren ha d'an doare ma vez meret o c'henwerzh hag o finvidigezh ekonomikel get an estren e sav holl ar re o deus kemeret perzh er guzuliadeg a-du :

- da ziskleriañ eo sistem an trevadenniñ, e forzh peseurt doare e vefe, un droug a ranker lakaat fin dezhañ an abretañ-ar gwellañ.
- da embann sklaer ha fraezh eo mont a-enep da wirioù diazez mab-den, ha kontrol da Garta an UNO, derc'hel pobloù 'zo dindan yev¹ ha mererezh ekonomikel an estren; kement-se ne ra nemet diaesaat gounid ar peoc'h er bed a-bezh.

Diskleriadur diwezhañ Kuzuliadeg Bandung , 28 a viz Ebrel 1955.

¹yev : beli, gwask, galloud.

Diell Nnn2

Brezel Aljeria (1954 – 1962)

Setu tregont vloaz, d'an 19 a viz Meurzh 1962, e voe embannet an arsav-brezel en Aljeria. Get an arsav-se e voe lakaet fin en un doare ofisiel da ouzhpenn seizh vloavezh brezel etre Talbenn Dieubidigezh Broadel Aljeria (FLN) hag ar Frañs. [...] Penaos ha perak emeur en em gavet en enkadenn-se ?

Dibenn 1954. Echu a ra ar bloavezh evel ma 'z eo deraouet. Fall. Kollet eo Indochina gant ar Frañs. Ha, d'an 1^{añ} a viz Du eo kroget un emsavadeg e Aljeria.


Evit Prezidant ar C'huzul, Pierre Mendès France, eo biskoazh sklaeroc'h an emzalc'h : «N'eus ket da soñjal en un disparti» etre Aljeria hag ar metropol. Perak ? Peogwir «Aljeria a zo ar Frañs». E ministr an Aferioù Diabarzh, François Mitterrand, a zo ali gantañ : «gant eneberien ar vamm-vro n'eus nemet un doare da vreutaat : ober brezel dezho.»

Ouest-France, 17 a viz Meurzh 1992

GROUPEMENT INTERACADÉMIQUE II - DIPLÔME NATIONAL DU BREVET		
Coefficient 2	Session 2003	Durée : 2 heures
Spécialité : COLLÈGE, option LV2		Épreuve : HISTOIRE-GÉOGRAPHIE
Normal Septembre	Ce sujet comporte 7 pages	Page 1/7

Diell Nnn 3.

Ar Frañs hag an didrevadenniñ.



Goulennoù.

8 poent

Goulen 1.

Diell 1 : War beseurt sav-poent en em glev izili Kuzuliadeg Bandung e-keñver an trevadenniñ ? War betra en em harpont da arguzenniñ ar sav-poent-se ?

Goulen 2.

Dielloù 1 ha 2 : Diskouezit penaos eo disheñvel emzalc'h ha sav-poent gouarnamant ar Frañs e 1954 diouzh sav-poent izili Kuzuliadeg Bandung ?

Goulen 3.

Ha deuet eo holl trevadennoù ar Frañs da vezañ dizalc'h ha dieub en hevelep doare ? Harpit ho respont war danvez an diell 3.

Pennad arguziñ

10 poent

Savit – en ur en em harpañ da gentañ war ar pezh ho peus desket ha gant skoazell an titouroù tennet deus an dielloù diskouezet - ur pennad war ar sujed-mañ: " An didrevadenniñ, un darvoud meur er bed goude 1945" (Tro 20 linennad)

Eil sujed

Galloud Unvaniezh Europa : doareoù ha bevennoù

Dielloù

Diell Nnn 1

Nerzhioù ha gwanderioù Unvaniezh Europa.

War vrasaat e ya Unvaniezh Europa; ha ken buan ma n'o doa moarvat biken soñjet an tadoù o doa krouet anezhi : c'hwec'h Stad ha 170 milion a annezidi e 1957, pemzek Stad ha 375 milion a annezidi hiriv an deiz. Deuet eo da vezañ ar strobad ekonomikel galloudusañ er bed get ur Proadur Diabarzh Gros (PDG)¹ tro-dro da 7 500 miliard a Eurioù; hag an tolpad kentañ evit an eskemmoù etrevroadel. Ouzhpenn-se en em gav liammet bremañ etrezo unnek Stad, diwar ar pemzek 'zo ezel e Unvaniezh Europa, en un doare start abalamour ma reont holl gant an hevelep moneiz, an Euro, abaoe ar 1^{añ} a viz Genver 1999. [...]

Er c'hentañ renk en em gav Unvaniezh Europa evit ar gounidoù tennet eus al labour-douar [...]; er c'hentañ renk ivez evit ar gounidoù o tont eus an industriezh, 60% uheloc'h eget re ar Stadoù Unanet ha div wezh uheloc'h eget re ar Japan. Er c'hentañ renk en em gav c'hoazh e-keñver ar gounidoù tennet eus ar servijoù, just dirak ar Stadoù Unanet, atav ar re gentañ evit ar pezh a sell an ezporzhiñ servijoù. [...]

War dachennoù 'zo eo gwanoc'h Unvaniezh Europa, hag en em gav a-dreñv ar Stadoù-Unanet hag ar Japan evit ar pezh a sell, da skouer, an elektronik, an informatik, ar c'hleweled, an apotikerezh hag al louzoùier, ar bioteknologiezh ha produiñ danvez kulturel a-vras.


Jean Louis MATHIEU, *Quelle Union pour l'Europe ?*

Documentation Photographique, La Documentation Française, Nnn8008, Ebrel 1999.

¹ PGG = PIB.

Diell Nnn2

Lodenn an tolpadoù rannvroael bras e ekonomiezh ar bed.



Diell Nnn3

Porzh-mor Rotterdam, ur porzh bras e Europa.

En desped da borzh-mor Rotterdam en em gavout en 3^{vet} renk evit kas-ha-degas ar c'hontainers, en em gav er renk kentañ evit hollad an treizherezh gant ouzpenñ 300 milion a donellad er bloaz.

Lennoù-porz, magazinioù hag akipamantoù ispisializet¹ a gaver a-hed un tregont kilometrad bennak etre kêr ha Mor an Hanternoz, war un dek kilometr bennak a zigorded. Arru a ra pep marc'hadourezh degaset dre vor e beg ar Rein, kentañ hent kas-ha-degas dre stêr er bed a-bezh, hep disofijal al liammoù a gaver eno gant rouedad stank hentoù-houarn ha gourhentoù Europa [...].

Rotterdam [...] a zo kentañ dor digor war ar mor an tolpad kenwerzhorel galloudusañ er bed a-bezh.

*Jean Louis MATHIEU, Quelle Union pour l'Europe ?
Documentation Photographique, La Documentation Française, Nnn8008, Ebrel 1999.*

¹ Akipamantoù ispisializet ar porzh-mor a zo liammet start get tachennoù industriel, get luzinioù purañ coul-maen dreist pep tra.

Goulennoù
8 poent.

Gouenn 1.

Dielloù 1 ha 2 : Roit 4 skouerenn o tiskouez galloud ekonomikel Unvaniezh Europa.

Gouenn 2.

Dielloù 1 ha 2 : Roit anv an daou dolpad (pol) ekonomikel er bed estreget Unvaniezh Europa. Roit anv an div vro a ra ivez kevezerezh da Unvaniezh Europa.

Gouenn 3.

Diell 3 : Penaos e tiskouez porzh-mor Rotterdam galloud ekonomikel broioù Unvaniezh Europa ?

Pennad arguziñ.
10 poent

Savit - gant skoazell titouroù tennet deus an dielloù hag ar pezh ho peus desket - ur pennad war ar sujed-mañ : "Galloud Unvaniezh Europa : doareoù ha bevennoù". (Tro 20 linennad).

EIL LODENN : DESKADUREZH KEODEDEL.

(12 poent)

Sujed

Ha ret eo lakaat da dalvout pennreolennoù¹ ar Republik C'hall evit ma vevo ar Vroad ?

Dielloù

Diell Nnn1


Eus al lezen a-enep d'ar forc'herezh (28 a viz Gouere 1998)²

Mellad 1. – Labourat a-enep d'ar forc'herezhioù a zo un dle broadel diazezet war an doujañs a zleer d'an holl dud abalamor d'o hevelep dinite a vab-den; al labour-se a zo da vezañ sevenet kentañ-gwellañ en holl politikerezhioù foran ar vroad. Graet eo al lezenn-mañ evit ma vo gwarezet war an tiriad broadel a-bezh ar wir galloud evit an holl da gaout o gwirioù diazez e-keñver labourat, en em lojañ, deskiñ, en em stummañ, tostaat ouzh ar c'hultur, kaout gwarez evit ar familh hag ar vugale[...]. [Dalc'het e vo get] ur bolitikerezh he fal dizoloiñ, parraat ha diskar an holl degouezhioù gouest da zegas forc'herezh.

¹ : pennreolennoù = reolennoù pennañ, reolennoù diazez, "*principe*"

² : Forc'herezh = "*exclusion*".

Diell Nnn 2



Diell Nnn3

Eus ar Vonreizh.

Mellad 1 – Ur republik unan ha dirannapl, laik, demokratel ha sokial eo ar Frañs. Gwarezañ a ra ingalded an holl geodiz e-keñver al lezenn hep teurel pled ouzh o orin, o gouenn pe o relijion. Doujañs he deus evit an holl kredennoù.

Goulennoù

4 poent

Gouenn 1.

Diell 1 : Petra eo pal pennañ lezenn an 28 a viz Gouere 1998 ?

Gouenn 2.

Dielloù 1 ha 3 : Lezenn an 28 a viz Gouere 1998 a ziskouez ster mellad 1 ar Vonreizh. Penaos ?

Gouenn 3.

Diell 2 : Daou arouez (simbol) a Republik ar Frañs a weler war an diell-mañ. Pere ?

Gouenn 4.

Diell 2 : Un diell ofisiel eo an diell-mañ ; reiñ a ra ur gwir d'ar c'heodad. Pehini ?

Gouenn 5.

Dielloù 2 ha 3 : «Votñ a zo ur gwir, ha dever pep keodad ivez». Pe pennreolenn diazez Republik ar Frañs a gaver dindan ar frazenn-mañ ?

Pennad arguziñ

8 poent

Savit ur pennad war ar sujed-mañ: " Ha ret eo lakaat da dalvout pennreolennoù ar Republik C'hall evit ma vevo ar Vroad ?"; evit arguzenniñ, c'hwi a raio al liamm etre an titouroù kinniget en dielloù. (Tro pemzek linennad)

ARABAT SKRIVAN TRA EBET AMAN.

Arabat disoñjal reiñ an diell-mañ gant ho kopienn goude an arnodenn !

**TEIRVET LODENN : KAVOUT E VERKOU EN AMZER
EN EM RETERIÑ WAR AN DOUAR.**

(6 poent)

1. E pe bloaz e oa bet kurunet Karl-Veur ?
.....
2. Petra eo an daou ziviz bet kemeret get An Eil Republik e 1848 ?
.....

3. Skrivit anvioù ar c'hêrioù-mañ e-kichen ar pik a zere ouzh pep unan anezho : Bourdel (Bordeaux), Strasbourg, Naoned (Nantes), Marseille.

